

Goajilin. (Boisgelin)

Illied rolland an treidourec
 en deus lazet e mab kosa
 evid ober autrou he iaouanka.

Illied Rolland a lavare
 De flac'h eun deiz a voe.
 Iaka ar vassin vras var an tan
 evid skotta an oac'h bihan.

ne c'houffe ked beza a voc'h lard en ti man
 Pa ne vezont e chraou e lardan.

Pe ie illied Rolland deus an erc'h
 e ie ar gontel deus e brec'h
 e map bastian arrozi
 da zalc'hel ar goulou dezi.

— Sko an tol kenta me skoio an eil
 me skoio an eil ag an dride
 petek ar maro goude ze.

— va mam ar galon ne meus ket
 Da laza va breur ag hen kousket.
 houarzin a goëla ouzin a ra.

— va breur bastien n'am laz ket
 me a krei otrou pa na zout ket
 Var peder milin var seiz maner
 var eur riñvier.

— va mam illiedik nam lazit ket
 me ho kraï itron pa na doc'h ket
 var seiz maner
 var peder milin var eun riñvier
 iel va hunan da iaouaer.

— gra da in manus pa giri
 e maout er plas ma varvi.
 in manus tuas domine

Jesus o ped truez deus va hine
Klaskit din eur beleg.

Va c'hassit da vervel dar marchossi
pa n'deus den truez ouzin
ma vello va marc'h va merziri
pa nan n'eus den truez ouzin.

Pa zisken illiet en traou
Jaffrike ar goad en he boutou
goude laza e mab kossa
vid ober otrou he iaouanka.

Pac'hik pac'hik bian
te zo dilijant a buan
Ke de kerchat gwin d'as mest zo klan
mil aont meus ne hallo e tanvan.

Pa voa e vond gand an ent bras
Otrou an doujet e rankontras.
— Bonjour dide pachik bihan
na pelec'h a zez ker buhan ?

— Da kerchat guin d'am mest zo klan
mil aont m'eus ne allo he tanvan.
Na mar kerit nam ziskuillot ket
me lavaro dec'h petra zo c'hoarveet.

illied rolland an treitourez
en deus lazet e mab kossa
evid ober otrou ar iaouanka.

Hast a fo ke en da ent
me ia breman duze.
— Debonjour a joa en ti man
an otrou goajilin pelec'h eman ?

e man en e goële kousket
mar gred eneb trous e divunet.
— fenos deus an ti man me nen dan
an otrou goajelin ma ne vellan.

an otrou goajelin na vellot ket
e man en he goele kousket
ma red eneb trous e divunet.

an otrou goajelin na vellot ket
e man en he archet archedet
a baoue an anter-noz e tremenet.

a pa kouste dime pemp kant skoët
me lakaïo digeri an archet
lakat ta krouga mar bez red.

— me ne vin ket krouget gant korden
me meus arc'hant da prena seizen.
— mad avoalc'h e ar gorden daz goug
evid ta sevel deus ar groug.

Mari Koad, 14 juillet 1851.